

IMBROURCH



un hent
a gavan



pe a zigoran

kelaouenn

bolitikel

niv. 20

31 Eost 1971

IMBOURC'H, K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Niverenn 20

31 Eost 1971

T A O L E N N

Devezhioù-studi hañv S.A.E. e Rosporden, 2-12 Eost 1971.....	p.191
An Emsav ha luskadoù an enep-stuziadur(skrivadenn)	p.196
Roll ha lec'h an devezhioù-studi gant F.F.	p.197
Lizher e ser an embannerezh brezhon	p.202
Daeadenn an Arvorig, gant Henri Deligny.....	p.204
Notenn diwar-benn talvoudegezh pleustrek an devezhioù-studi gant Y.O.	p.210
An Emsav hag al luskadoù kenelelour-kleizour	p.212

Ar pennadoù embannet gant izili EMSAV AR BOBL VREZHON ebarzh IMBOURC'H
ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. ollivier, 1 534 25
Roazhon. Deraouifi a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver. Priz an
niverenn : 2,00 lur. Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da EMSAV
AR BOBL VREZHON (IMBOURC'H), 30 leurgêr al Lisoù, Roazhon.

CPPP : 50 015

DEVEZHIOU - STUDI HANV S. A. E.

E R O S P O R D E N 2 - 12 E O S T 1 9 7 1

.....

Hevlene eo bet dalc'het devezhioù-studi bras

Skol An Emsav e Rosporden etre an 2 hag an 12 a viz Eost. Degemeret eo bet ar berzhidi war-un-dro e "Penn-ar-Pont" en oaled ar vicherourien yaouank hag en ur skol barrez evit ar c'hentelioù.

Al labour graet e-kerz an devezhioù-studi-se hag an tuadurioù nevez a zo frouez al labour bet graet abaoe daou vloaz bremañ ha . . . an enklaskoù graet evit gwellaat atav hon doareoù ober. Gellout a reer menegiñ meur a gemm a ziskouezo o zalvoudegezh dre ar pleustr :

1 - Devezhioù-studi kentañ Skol an Emsav e oant e gwirionez. Betek henn e oa bet aozet an devezhioù-studi gant Emsav ar Bobl Vrezhon. Hogen chom arae amsteriek al labour da ober en devezhioù-studi dre ma veze graet dreist-holl ur stummadur war ar yezh, labour E.B.V. o vezañ politikel. Aozet eo bet devezhioù-studi S.a.E. eta evit resisaat labour an aozadurioù hag an emsaverien evit ma c'hello S.a.E. bezañ frammet buanoc'h ha mont endro evel un aozadur emren.

2 - Klasket eo bet kacout muioc'h a zarempredoù gant tud ar vro peogwir e oa bet meneget ar si-se e devezhioù-studi Kistreberzh 70. War an tu-se eo bet graet ur paz en araok e Rosporden ; henn gwelet e vo e renta-kont an obererezh.

3 - Kresket e vo niver ar prantadoù-studi evit meur a abeg :

- o vezañ ma kresk niver an dud hag e vo diaesoc'h diaesañ o bodañ holl a-gevret.

- peogwir eo diaes da zarn bezañ dieub evit ur mare resis.

- peogwir e vo aozet devezhioù-studi rannvroel aesoc'h evit tud ar rannvro, krouiñ kreizennoù nevez, lakaat muioc'h a dud da gemer perzh el labour, skanvaat labour ar c'heizennerezh.

Gellout a reer rannañ e teir lodenn obererezh an devezhioù-studi :

1 - Al labour stummañ war ar yezh a veze graet dreist holl gant kentelioù diouzh ar beure : div eurvezh kentel war ar brezhong, un eurvezh studi danvezioù all : istor, armerzh, douaroniezh tironiezh, jedoniezh. Trizek kelenner o deus kemeret perzh el labour se evit pevar rummad. Graet eo bet ouzhpenn-se ur gentel skouer war arbrezhoneg evit ar gelennerien pe an danvez kelennerien.

Bodadoù komz o doa ivez da bal boaziañ an deraouidi ouzh ar yezh hag o lakaat da gomz. Alies avat e oant bodadoù komz war un danvez politikel.

2 - Ar bodadoù komz pe gendaelioù a oa o danvezioù :

- Ar vuhez e brezhoneg e kêr hiziv.

- Emdroadur armerzh Breizh.

- Unyezhegezh : divyezhegezh.

- Burutelladennoù da heul ur gendael gant un ezel eus ar P. S. U

-An emskiantekaat broadel er skolioù e Breizh.

- Skol an Emsav : ar roll a dle c'hoari e Breizh hag an arvezioù pleustrek.

- Feulster ha difeulster e Breizh.

- Penaos komz gant an dud er-maez eus an Emsav.

A-hend-all e c'heller menegiñ div gendael all a denn war-un-dro d'an darempredoù diavaez ha d'ar stummadur war gudennoù ar vro :

- Ur gendael gant un ezel eus ar P.S.U. e galleg : "Perak ez on brezhon; perak ez on sokialour."

- Ur gendael gant daou ezel, dileuridi eus ur sindikad gounideien (labourerien-douar), diwar-benn ar gounezerezh e Breizh hag e penn-ar-bed ha diwar-benn ar gudenn vroadel dre vras.

3 - En trede lodenn-mañ (an darempredoù diavaez) eo ret menegiñ ar bruderezh graet gant pep hini o komz gant an dud e Rosporden, gant ar gazetennerien ("Ouest-France" hag an "Telegramme"), ar bruderezh graet e festoù-noz (Tregunc, Landelo, ha Kerrien). Da heul fest-noz Kerrien ez eo bet embannet war an "Telegramme" (embannadur Rosporden, 12 Eost 71) ur renta-kont a-du gant Skol an Emsav o doa graet bruderezh evit an Emsav er fest-noz-se hag o doa tamallet "galvidigezh touristel Breizh".

Un oferennvrezhonek a zo bet gozet ivez e Nizon an 8 Eost, lec'h m'o deus kemeret perzh un toullad tud eus an devezhioù studi.

Diouzh ar sul 8 a viz Eost ne voe na kentelioù, na kendaelioù. E-pad an ehan-se e c'hellas ar berzhidi ober anaoudegezh

gwelloc'h etrezo o vont da vale dré ar vro.

Un dalc'h arnodenniñ evit an Trec'h kentañ zo bet aozet ar merc'her 11 eost.


Da glozañ an devezhioù-studi e voe ur gendael evit dezrann al labour bet graet e-pad an dek devezh-se. Evit dezastum ar barnadennoù, e c'heller lavarout e vez kavet mat bepred ar prantadoù-studi-se, peogwir ez int un doare d'en em stummañ ha da gejoue etre tud a labour e lec'hioù disheñvel. Prientiñ a reer eno al labour da ober. An holl a anzav ez eo frouezhus an hentennoù nevez dibabet hol laka da gaout darempredoù gant tud ar vro hag an aozadurioù all e Breizh.

Ma'z eo mat avat ar bodadoù komz evit studiañ gwelloc'h ar yezh, n'int ket ken talvoudus evit prederiañ, d'an nebeutañ evit an deraouidi.

Evit ar c'hentelioù ez eus bepred un nebeut araokadennoù d'ober. Da gentañ eo ret adlavarout ne vo tennet ar gounid brasañ eus an devezhioù-studi nemet mard eo bet studiet aketus a-walc'h en araok gant an deraouidi.



Diouzh un tu all, ar c'hentelioù war ar yezh ne glotont ket gant an holl daoust d'ar pevar rummad disheñvel, rak live ha tachenn anaoudegezh pep hini zo disheñvel alies, dreist-holl er rummadoù uhelañ. Muioc'h mui e verzer an ezhomm a zevezhioù-studi arbennikaet a gemerfe lec'h kentelioù re lennegel evit darn ha ket a-walc'h evit re all. Un dra ret e chom avat evit an holl kenderc'hel da studiañ evit pinvidikaat o yezh.

Er rummad III (eil pe trede bloavezh) e vo mat studiañ
testennoù gant gerioù arnevez ha displegañ war-un-dro ar yezhadur.
Evit ar rummad II e vefe ret kavout testennoù difetisoc'h hogen gant
frazennoù boutin, ha displegañ ar yezhadur war-un-dro, hervez hetoù
ar skolidi .



ADAL AN NIVERENN A ZEU E VO ADAOZET KEMPENNADUR HA
MERADUR AR GELAOUENN. KEMERET E VO UN NIVERENN
K.R. NEVEZ. DRE SE AR RE A GARFE KAS O C'HOUMANANT
BREMAN A ZO PEDET DA C'HOUREZAN O FAEADENN E-PAD
UR PENNADIG AMZER.


EVIT REIN MUIOC'H A LIESSEURTIEZH HAG A ZILEURIUSTED
D'AR GELAOUENN E PEDOMP LENNERION IMBOURC'H, KELENN
ERION HA SKOLIDI S.A.E. DA GAS DEOMP PENNADOÙ HA
KELEIER A BEP SEURT.



DEVEZHIOU-STUDI GWENGOLO

Dalc'het e vint eus ar sul 5 da noz betek ar yaou 9
a viz Gwengolo d'abardaez, e BULAT-PESTIVIEN (C.d.N.) etre Gwengamp
ha Kallag (Kerne-Uhel). Ar skol zo war hent Kallag e Bulat.

Priz an devez a zo 12 lur, ar gwirioù enrollañ 5 lur
da nebeutañ. Yalc'hadoù a c'hell bezañ roet. Priz an devezhioù-studi
klok a vo neuze 53 lur gant ar gwirioù enrollañ.



A N E M S A V H A L U S K A D O U .

A N E N E P - S T U Z I A D U R

(Skrivadenn roet e Devezhio ù-studi ROSPORDEN, er rummad uhelañ)

Emañ ar skrivagner amerikan Theodor Roszak o paouez embann ul levr a zo e dalbenn "Savidigezh un enep-stuziadur" (1) e-lec'h e klask taolennañ luskadoù o deus kemeret da amkan erlec'hiañ ouzh ar stuziadur skiantel a vremañ diazezet war wengel an ergorelouriezh ur stuziadur nevez naturelour, lamet dioutañ an tennderioù hag an dislavaroù a ziemp ar gevredigezh skiantelour hag a zisoc'h en diwezh d'ar feulster ha d'an distruj.

Hervez ar skrivagner-mañ eta e vefe roll an hippied, lakaomp, par da hini ar gristenion gentañ o deus treuzfurmet tamm ha tamm ar sevenadur roman danvezelour hag amsavet anezhañ gant ur sevenadur nevez a roe al lec'h kentañ d'an talvoudoù speredel.

O vezañ ma fell d'an Emsav e Breizh ivez kemm ar gevredigezh ha reiñ ur ster nevez dezhi e c'heller en em c'houlenn ha ne vefe ket un darempred bennak etrezañ hag al luskadoù emañ o paouez menegiñ.

NE gav ket deomp avat. Daoust d'an heñvelderioù ha d'an nesterioù a c'hellfed dizoleiñ etre al luskadoù nagennelour hag an Emsav e chom evelkent meur a ziforc'h a-bouez bras etre ar re-se hag hemañ. An Emsav, da skouer, a zo perzhiek dija en un argerzh istorel kozh a-walc'h peogwir e sav hemañ betek kreiz an naontekvet kantved ; emañ an Emsav eta en istor tra ma nac'h al luskadoù nagennelour an istor betek mennout distreiñ da varadoz-an-douar (pa empennont, da skouer, un dibenn tost d'an istor). D'an eil, daoust d'al luskadoù nagennelour-se ha d'an Emsav bezañ mennet da grouiñ ur sevenadur nevez diazezet war un "natur" denel bennak - se zo anzav evit an eil loulz hag evit egile ne c'hell ket mab-den en em grouiñ dre ar galvezoniezh hag ar galloud stadel - en ur zinac'hañ ur skiantelouriezh krin en deus an Emsav evelkent amkanioù diforc'h mat diouzh re an nagennerion o vezañ maz eo mennet -zñ avat da dizhout ar gevredigezh penn-da-benn, kreç'h-traon, da intrañ, da enstummañ ha dregemm anezhi en he fezh tra ma vourr an nagennerion en eneb o chom war ar vevenn, oc'h en em lakaat er-maez eus ar gevredigezh dinazel, betek he disteurel hag asantiñ eta en diwezh da venel da viken en ur geto. Se zo lavarout e venn an Emsav kas un dispac'h da benn, da lavarout eo distrujañ ur gevredigezh evit sevel unan all en he lec'h.

An trede diforc'h a zisrann an Emsav diouzh al luskadoù nagennelour a ziwan diouzh an daou ziforc'h kentañ hag a sell ouzh an hentenoù o unan. Dre ma fell d'an Emsav tizhout ar gevredigezh en he fezh e rank adframmañ houmañ er stern nemetañ a aotrefe dezhañ diraez hevelep pal hag a zo anezhañ ar Stad (pezh na lavar ket tamm ebet e c'heller kemmeskañ ar stad gant ar galloud stadel e unan). Ned eo ket an ar erzh nagennat ha distrujañ an hini pouezusañ evit an Emsav (pezh ez eo evit al luskadoù nagennelour a zo nac'helour dre natur ivez). Kalz pouezusoc'h eo er c'hontrol evitañ an argerzh krouiñ ken e par ar stuziadur ken e par an ensavadurioù politikel o unan.

Evel-se eta, ma c'hell an Emsav, diouzh an dro, en em harpañ war an holl nerzhoù diemprañ a denn da ziskar ur gevredigezh aet da hesk ha kroget da vremañ ne oufe-eñ evit keloù-se menel da nep mare e rez al luskadoù nagennelour rak diwall a rank bepred, e pep pazenn eus e obererezh da erlec'hiañ ouzh ur gevredigezh a zo tonket dezhi mont da get ur gevredigez nevez a zo da vezañ krouet gantañ e unan.

(1) "The making of a counter-culture"

RO L L H A L E C ' H A N D E V E Z H I O U - S T U D I

Pescurt roll o deus bet an devezhiou-studi en hon labour emsavel betek henn ?

Pescurt. lec'h reiñ dezho en amzer-da-zont ?

Abaoe ar brezel e oa bet meur a rumm devezhiou-studi e Breizh. Ar re vrudetañ, aozet bep bloaz gant K.E.A.V. o deveze hag o devez c'hoazh pouez bras e buhez an Emsav. Lod all, un amzer zo bet, ha n'eus ket keit-se c'hoazh, a oa un digarez da vodañ holl izili ur strollad, pe dost, e-pad ur sizhun bennak, e sell da gadarnaat o c'hredennoù hag ivez da gilhañ gwech ha gwech all un nebeudig diskibion a zeufe, e koulz vat, da greskiñ ar meuriad. War goazhañ eo aet ar rumm-se avat, nemet eo ret derc'hel soñj anezhañ evel "enepskouer".

Eizh gwech abaoe diskar-amzer 1969 ez eus bet dalc'het devezhiou-studi gant E.B.V. pe SKOL AN EMSAV, hep kontañ, weljust, an devezhiou-studi lec'hel ha na badont nemet nemet un devezh ep e zaou. Etre miz Genver ha miz Gwengolo 1971 e vo bet dalc'het 22 devezh-studi (4 e Koad-an-Doc'h, goude Nedeleg, Pevar da Lanuon da Bask, 10 e Rosporden e miz Eost ha 4 e Bulad e miz Gwengolo). Dalc'hmat ez a niver ar berzhidi war greskiñ ha live al labour war wellaat. Tra gaer ivez, ne weler ket peurluviañ an hevelep pennoù eus un eil kamp d'egile. En enep d'an devezhiou-studi meneget uheloc'h, ne gaver ket eno kalz "aficionados".

Koulskoude n'eo ket trawalc'h ober berzh ; mat eo prederiañ war doare nevez hon devezhiou-studi. Un darn vat eus perzhidi Rosporden, da skouer, a oa deuet eus pell (Paris h.a.), pe e oant chomet digenvez a-hed ar bloaz. Ma lakaer a-gostez trev kreiz-kêr Roazhon, ne oa ket deuet ken stank-se izili an trevioù. Meur a abeg a zo d'an dra-se. Da gentañ, bremañ ma vez strewet ha ma vo strewet muioc'h-mui an devezhiou-studi a-hed ar bloaz e c'hall an izili dibab ar mare a zere

gwellañ outo. A-douez an emsaverion-se ne zeuy bremañ nemet ar re o deus ur garg a gelenner pe all. Ouzhpenn, lod eus an dud yaouank a zeu da SKOL AN EMSAV pe a labour gant E.B.V. zo studierion, pe skolidi an eil derez, ha n'int ket atav e-touez ar re binvidikañ, na tost. Ret e vez dezho labourat e-pad an hañv evit gonit arc'hant. Un abeg all a welan c'hoazh : gwechall, pa ne oa ar "gevredigezh vrezhon" nemet ur c'heal war ar paper o doa an emsaverion ezhomm d'en em vodañ holl a vare da vare. Kemm zo bet abaoe : kalzig emsaverion, boazet maz int bremañ da zaremprediñ ur gevredigezh emsavel ha brezhoneg-erez, e Roazhon, da skouer, ne welont ket mat marteze perak e teufent, ouzhpenn, d'an devezhioù-studi. E gwirionez eo kalonekaus a-walc'h an emdroadur-se, dre ma laka anat e kresk ment ha levezon an emsav en un doare fetis. Deut eo an emsavelezh da vezañ tra ar vuhez pemdeziek, ha n'eus ket mui ezhomm da dec'hout. "davit an emsav" evit pemzektez.

Koulskoude e vefe ur fazi soñjal ne dalv ket ar boan da unan dont d'an devezhioù-studi war zigarez e oar mat brezhoneg pe e kemer perzh ingal en obererezh ar greizenn-mañ-kreizenn. Menegomp da gentañ spletou anavezet mat an devezhioù-studi : deskiñ pe beurzeskiñ ar yezh, embreger anezhi pa n'eur ket kustum d'ober (dreist-holl war dachenn ar mennozioù difetis), tapout un tamm deskadurezh war istor, douaroniezh, armerzh, lennegezh Vreizh... Kement-se avat a chom war an dachenn galvezel ha n'eo ket marteze ar pep pouezusañ. Nebeut a dra zo da lavarout ouzhpenn, paneve e tle ar gelennerion en em varrekaat c'hoazh ha neveziñ o doareoù-kelenn.

Ur roll brasoc'h, met amjestroc'h da zisplegañ, o devez an devezhioù-studi. Estreget reiñ tro d'an emsaverion da gejañ, da eskemm mennozioù, da bleustriñ a-gevret en un doare fetis war zanvezioù a bep seurt, ez embregont ul levezon vuhez war an holl. Gwir eo dreist-holl evit keloù an emsaverion distroll, ar re n'int ket e darempred strizh gant kreizennoù SKOL AN EMSAV pe trevioù E.B.V. Ouzhpenn

ar stummadur diazez e ro an devezhioù-studi youl da stourm ha da labourat. Ken bras all eo al levezon war an danvez emsaverion yaouank : dre ar pezh a reomp ez omp anavezet ha da zibenn an devezhioù-studi-se, geriennoù evel "kevredigezh vrezhon" pe "ster dispac'hel ar brezhoneg" a vo warno ur ster fetis. Ar frouezh a vez tennet eus labour an devezhioù-studi eo ar gwellañ bruderezh a oufed da ober. Anavezet hon eus holl izili pe zanvez izili a chome da argilañ, tud a veze dalc'hmat etre paouez hag ober pe reoù yaouank na blije netra dezho koulz ha gwerzhañ SAV-BREIZH pe B.R. pe mont da begañ skritelloù. Goude kemer perzh en devezhioù-studi o deus komprenet drezo o unan skeul an talvoudoù el labour emsavel, ha peurliesañ int en em lakaet da labourat.

Ar stourmerion all, koshoc'h , pe "ansien" mar kavit gwell, e ro an devezhioù-studi dezho ur broud, ul lusk. Evit kalz tud eo tenn labourat ingal, a-hed ar bloaz, hep gwelout mat atav frouezh al labour-se o tont a-wel. Aer nevez, freskoc'h ha yac'husoc'h a gavont en devezhioù studi.

Pleustr an devezhioù-studi zo ivez ur skouer vat eus al labour emsavel. Hon labour n'eo ket silañ ur gelennadurezh "dir ha tan" en empenn ar Vrezhoned, evel ma kred c'hoazh da E.S.B. ! N'eo ket dibab un dornadig tud hag ober eus pep hini ur gour peurstummet ha peuzdidalvoud, evel ma c'hoarvez bremañ. Ar pal n'eo ket enteuziñ an holl Vreizhiz, moulañ o bred, peurunvaniñ o mennozioù ! Al labour pennañ, mallusañ hag aesañ da seveniñ eo unanaat an holl Vrezhoned-se er pleustr, el labour emsavel pemdeziek.

Betek Kestemberzh e oa chomet an devezhioù-studi serret warno o unan. Aes eo da gompren pa ouzer e oad o vourc'hañ an erv. Met un amzer zo da bep tra hag eno dija e oa bet raktreset digeriñ an devezhioù-studi war an diavaez er bloaz-mañ. E Rosporden eo deut da wir ar mennozioù-se. Perak ? Dre berzh stummadur ha skiant-prenet an emsaverion, sur a-walc'h, met ivez a-drugarez d'ar spered emsavel nevez diorreet en E.B.V. Dre ar strivoù-se

eo bet dibradet an devezhioù-studi diouzh an dachenn skolel pe sevenadurel rik.

Lies stumm zo bet d'an obererezh-se. An hini taerañ hag amjestrñ ivez eo bet kas trouz en un nebeut abadennoù touristel e Tregon, Kerien h.a. Meizet mat eo bet ster ar reuz-se, ma varner diouzh ar pennad embannet war an Télégramme d'an 11-08-71 bepred. Evelkent e vo mat an amzer-da-zont displegañ fracshoc'h ar gudenn da dud ar vro. Anez da se e vo aes d'ar frammoù gall tremen ac'hanomp da "zrailherion" a vicher (dija e oant war-nes gervel ar polis, ha tagañ ac'hanomp er c'hazetennoù). An eil poent eo al labour brudañ kaset da benn e Kerien, Landelo, Rosporden, dre werzhañ levrig E.B.V. a zorn da zorn festoù-noz. Talvoudus eo al labour-se dre ma ro tu, bep tro, da zaeliñ gant an dud. Kizidikaet eo ar boblañs ouzh "kudenn Vreizh", he peurliesañ e vez graet degemer mat d'al levr ha d'ar werzherion. Pal an obererezh-se avat ne zlefe ket bezañ hepken ober brud met stagañ darempredoù gant an danvez emsaverion a zo skignet e pep lec'h. Da fedez eus bet aozet kendaelioù gant tud eus an diavaez, ur wech gant ur stourmer brudet eus ar P.S.U. war sokialouriezh ha broadelouriezh; ur wech all gant labourerion-douar yaouank eus Kernev. Bep tro eo bet frouezhus bras an eskemm mennozioù. Setu eta berr-ha-berr al labour daivaez bet kaset war-raok en devezhioù-studi.

Al labour boulc'het e Rosporden a zleo - se zo sklaer - bezañ kendalc'het e par ar c'hreizennoù. Anzav a ranker avat ne vo ket ken ha ken fonnus dre-holl. Degouezh an devezhioù-studi zo dibar e meur a zoare dre ma vez enno kalz tud bodet a-gevret, prest da labourat betek dek eurvezh bemdez. N'emañ ket kont evel-se en trevioù. Koulskoude ne vefe ket emsav, war zigarez se, mirout an trevioù serret warno o unan ivez. Ne zleont ket bezañ kelc'hioù-studi hepken. Ret eo dezho tremen eus al labour hogozik skolel renet warlene da labourioù liesseurt: stummañ, brudañ, politikerezh pleustrek. Evit pezh a sell ouzh al labour diavaez e vo gallet mirout an darempredoù skoulmet betek

henn, diouzh ma vo leviet gant furnezh e-biou d'un nebeut skoilhoù. Ouzhpenn-se e vo mat strishaat an darempredoù gant strolladoù labourerion-douar, ha stagañ darempredoù nevez gant strolladoù micherourion pe all, diouzh ma vo tu.

Peseurt mad hor bez da dennañ diouzh an darempredoù-se? Da gentañ eo anaout kudennoù resis ar stroll-mañ-stroll, ar renkad-mañ-renkad, ha dreist-holl an doare ma welont-int o c'hudennoù. Ma lakaer a-gostez un toullad studiadennoù war Le Peuple breton peseurt strollad en deus graet al labour-se betek henn ? Diouzh an tu all e tegouezho deomp-ni displegañ linennoù pennañ hon c'helennadurezh. Evit ar mare e c'hallomp tremen atav da emsav senevadurel, rak pouez hon eus war an dachenn-se.

Dezastum a c'haller eta e ranker emprañ an devezhioù -studi ouzh al labour sevenadurel ha politikel hollek. O roll a vefe neuze heñchañ an emsaverion war-du doareoù nevez da labourat ha da stourm, ha reiñ tro da zezrannañ ha da zezvarn al labour graet a-gevret. Arabat e vefe neuze chom sonnet er furmoù hon eus kemeret betek bremañ..Gallet e vo derc'hel d'an devezhioù-studi war ar yezh evit skolioù SKOL AN EMSAV, met ret e vo diorren devezhioù-studi lec'hel, berroc'h aozet en-dro d'ur greizenn pe greizenn, gant harp izili all eus Roazhon, Paris pe all. Arbennikaat an devezhioù-studi zo d'ober ivez, pe war ar politikerezh (damkaniezh, labour pleustrek, bruderezh), pe war an armerzh, pe war ar skridaozañ h.a.

Hogen liammet eo ar c'hresk-se ouzh meur a dra all: da gentañ, ouzh diorreadur ar gelennadurezh politikel. Stag eo ivez ouzh ar furmoù nevez a vo kavet er mizioù a zeu (filmoù, nozvezhioù sevenadurel ???). Gant nebeut a ijinadennoù e c'haller ober kalz labour e Breizh hiziv. An dalc'h n'eo ket tuta, tamm ebet ; n'eo ket ivez e virfe an dud "tutaet" mennozioù broadelour pe emsavel ; an dalc'h eo e labourfent. Frammañ, d'am soñj, a dalv kement ha reiñ tro da bep ezel da implijout e varregezh diouzh ar gwellañ e-lec'h m'emañ. A-hond-all e vano beuzet lod

kaer en ur bed a nennoziou.

Ur roll bras a zegouezh eta d'an devezhioù-studi : bezañ war un dro ur vammenn hag ur c'hejlec'h. Dre m'eo ret holl astenn an talbenn sevenadurel o devo an devezhioù-studi yezh "standur" ur roll diziouerus ; dre m'eo ken ret all d'ar bobl vrezhon gwelout pelec'h emañ he c'hudennoù hag en em aozañ da gemer he zonkad etre he daouarn o devo an devezhioù-studi nevez da bal prientiñ ha kas war-raok ar stourm politikel.

F.F.

LIZHER

E ser an embannerezh brezhon

Graet me eus va soñj diwar vremañ premañ div skouerenn eus pep levr brezhonek a zeufe er-maez ha d'o frenañ war baper kaer. War baper kaer, perak ? a c'houlennot. Hama ! peogwir e soñjan ez eo ar skouerennoù war baper kaer **startoc'h** ha padusoc'h. Div skouerenn ivez evit meur a abeg : harpañ an embennadurioù brezhonek, marteze, gellout prestañ en ur virout ur skouerenn er gêr, er goudor. EN ur marevezh evel bn hini ez eo seurt oberiadenn un oberiadenn dreist-bevañ : lakaat hor sevenadur brezhon miret en nebeut levrioù-se strewet hag a ranker strewiñ ar muiañ ar gwellañ. C'hoarzhit, mar karit ; hejit ho tiskoaz ! N'eo ket an oberennoù dornskrivet hepken a ya da get da viken hogen, da skouer, ne gaver mui hiziv an deiz nemet ur skouerenn eus "Milouer an Ankoù" a voe moulet meur a gant skouerenn anezhi ; a-wechoù div pe deir skouerenn eus al levr moulet-mañ-levr moulet. Netra breskoc'h eget ul levr. Ha padal omp holl diwallerion ar sevenadur brezhon. Hag int skignet en hon levraouegoù o deus an oberennoù brezhonek ur chafis bennak da zreistvevañ. Dav eo deomp gouzout peseurt enebourion o deus al levrioù : ar glebor, ar razhed hag al logod, an taniou-gwall hogen dreist-holl an dud o unan, o gwallegezh hag o diouiziegezh pa ne vez ket o enebiezh ha netra ken.

Nag a levrioù prizius am eus gwelet hag int drailhet gant bugale, a stlabez er grignolioù, taolet d'ar blodoù, gwerzhet diouz priz o fouez paper ; el levraouegoù "broadel" pe "gêrel" n'int ket diwallet penn-da-benn diouzh al laeron hag an distrujerion.

An embannerezh brezhon avat a vo pennañ kudenñ ar bloavezhioù seikont. Tremenet eo an amzer ma e'helle Ronan Huon lavarout din en doa aon na vije brevet treustoù e c'hriagnol dindan pouez al levrioù hep gwerzh dezho. Roll al levrioù da werzhañ e ti-embann AL LIAMM a zeu da vezañ berroc'h-berrañ ; skridoù zo stankoc'h-stankañ a ya da hesk.

N'eus ket anv eta a embann bepred levrioù nevez ; ar gudenn a rankor diskoulmañ muioc'h-mui a vo hini an adembann.

Houmañ a zo ur gudenn a arc'hanterezh hag a amzer. Dirak ezhommoù brasoc'h-brasañ an embannerezh brezhonek, dirak ar gouleñn taeroc'h-taerañ d'al levrioù brezhonek e vo pounneroc'h-pounnerañ ivez samm renerion ar gelaouenn.

Day eo kaout eta un embregerezh emren evit prientiñ hervez ezhommoù ar pleustr hag ar c'halvezerezh al levrioù a zo da adembann, pergen.

Ret eo krouiñ ivez ur gevredigezh arc'hantañ ha kinnig d'an danvez prenerion ur seurt koumanant d'al levrioù da embann (un doare "kelc'h al levrioù"), pezh a zlefe devoudañ un arc'hanterezh reoliek.

Bezef pe vezef, ar garg-se eus an embannerezh brezhonek a zo ur gudenn a rankfe bezañ diskoulmet hep dale.

KERVORC'H

Da zivankañ : p.202 ("E ser...") Linenn gentañ -"Graet em eus..." e-lec'h "Graet me eus..." Linenn 6 : "embannadurioù..." e-lec'h "embennadurioù" Linenn 9 : ouzhpennañ "da vezañ" ebre brezhon "miret" ("da vezañ miret...")

EMBANNET eo bet ar pennad da heul war ar gelaouenn c'hall LE MONDE d'an 3 a viz Eost 1971. Goude meur a bennad all moulet abaoe un nebeut bloavezhioù e tiskouez ar pennad-mañ penaos e vez gwelet darvoudoù Breizh gant "intelligentsia" Vro-C'hall.

Arabac'h e vefe deomp kontañ war ar c'hedveno etrevroadel ha war skoazell broioù arall evit lakaat hon emsav broadel da vont war-raok (n'eus nemet gwelout disablanted an dud hag ar riezoù evit stourmoù ar Biafra pe ar aBengal) met n'eo ket didalvoud kedveno Bro-C'hall, ar vro drevañnerezh, evidomp. Arabac'h eo disofjal n'eo ket aet an trec'h gant ar F.I.N. war an dachenn soudardel (kalz krefvoc'h e oa ar C'hallaoued) met dachenn ar c'hedveno e Bro-C'hall. Hefvel dra hiziv evit brezel ar Viet-Nam hag evit Bro-Ulad.

A-bouez eo kendrec'hiñ Breizhiz eveljust met ar C'hallaoued ivez ez eo Breizh ur vroad. Evel-se o devo koustiañs fall ha ne vint ket ken krefiv da stourm a-enep d'an Emsav.

N'eo ket fall er c'heñver-se ar pennad-mañ da heul daoust ma seblant un tammig c'hvezhet komzoù zo, dreist-holl komzoù an daou veleg o deus bet d'ober gant ar c'helaouenner gall. Arabac'h krediñ en huderezh ar gerioù ha n'eo ket mat ober ganto n'eus forzh penaos hep kompren mat o ster. Re alies eo bet sellet an emsaverion - ha gant gwir abeg meur a wech - evel istrogellet. Taolomp pled bras oc'h ober gant ar goriadur marksat ma fell deomp bezañ degemeret da gengomzerion sirius.

J. ar Bihan

DAEADENN AN ARVORIG

gant Henri DELIGNY

=====

"M'en dije ur gouarnamant dizoue dismantret kement a ilizoù en ur vro, argaset ar veleion diouzh ar parrezioù hag ar seurezed diouzh an ospitalioù, difennet ouzh an Iliz plediñ gant ar gevredigezh, dilec'hiet ar boblañs-labour evit he lojañ ebarzh lastez-tiez, implijet anezhi evit labourioù izel, rediet anezhi da bourchas etre 40% ha 60% eus gisti ar riez, m'en dije torret ar youloù dre ar skol, ar c'hazarn hag an alkol, mouget an emsavadegoù kouerion gant ar polis, e vefe birvidik ha reizh kenañ ar gounnar a savfe er vro! Setu dres pezh a c'hoarvez e Breizh abaoe ar brezel. Nemet he deus ar gevalaouriezh kreizennerez c'hall c'hoariet en un doare ampart meurbet : breinet he deus an ene, lamet he deus e vlaz digant an hollen..."

Ar c'harmadenn-se a zo hini ur beleg, an ao. Bourdelles, unan eus an douaroniourion a anavez ar gwellañ ar "vroad" vrezhon ; gant e holl feiz a veleg "n'eo ket sioul e goustiañs..."

"Lavaret en deus ar C'hrist : karout a ri! hag abaoe ar brezel ne gredomp ket ken karout ar Vrezhoned. 'Dont a ri da vezañ den!' Ha ne gredomp ket ken bezañ Brezhoned e-touez ar Vrezhoned. 'An aviel a roi da anavezout d'ar re baour' hag ar re baour n'en em santont ket en o aez en hon ilizoù. 'Gouzañv ha mervel a ri evit o saveteiñ! Stlejet e vi dirak ar Brefeded hag ar varnerion!' Ha c'hoarvezout a ra ganeomp bezañ medalennet. 'Reiñ a ri dezho ar vuhez, ar vuhez fonnus, ar bara, an dilhad, o gweladenniñ a ri en o c'hleñvedoù hag en o zoulloù-bac'h; dont a ri da vezañ kannad ar vuhez hag an dassorc'hidigezh!' Ha skignañ areomp kelennadurioù eeunik ha diwirion evit "prouiñ" e tle ar Vrezhoned breinañ hag e tle Breizh mervel..."

Ha neuze e tegas a, ao. Nourdelles ar gudenn a ro enkreiz da gement a emsaverion gristen e Breizh hag e lec'hioù all.

"Piv 'ta, o varn ar wezenn diouzh he frouezh, a c'hell lavarout ez eo grevusoc'h en em glevout gant ar varksouriezh eget gant ar gevalaouriezh kreizennerez ? Diwar-benn houmañ hag hounnezh e tle ar c'hristen diwall d'en em douellañ. An dieubidigezh kevredigezhel ma rank kemer perzh enni - nemet e tianzavfe ar C'hrist hag e vreudeur - zo ur stourm evit dieubiñ e rannbarzh (er ster douaroniel) evit reiñ endro da annezidi ul ledenez e norzsh ar meurvor atlantel treuzfurm a-ratozh kaer en un dezerzh, ar gwir da ziorren o sevenadur hag hini o bugale..."

E Gomenec'h, e ti an ao. Person, ne gaver evit kinklañ ar sal-degemer nemet un dra : un delwenn eus Sant-Erwan, paeron an alvokaded ("alvokad e oa met laer n'oa ket," eme an enskrivadur) ha paeron beleion Vreizh ivez. Kavout a reer war an arc'h muñudoù e brosez santelezhañ. Gant an testennoù-se e klask person Gomenec'h kenaozañ un "doueoniezh eus ar feulster". Daoust hag-eñ ne gasas ket Erwan ar gouerion da vazhata ha da argas dileuridi Philippe-Le-Bel a glaske skrapañ teñzor Breizh ?

"Klotañ a ra mat an istor-se gant stad an traoù bremañ. Ne fell ket deomp e vefe dilamet digant Breizh he zeñzor, ene hor pobl. A-enep dezhi e vez sevenet ur feulster grevus kenañ, armerzhel, kevredigezhel, sevenadurel ha droug zo ennomp dirak seurt direizhder. Emañ hor pobl o c'houzañv poanioù re bounner abaoe re a amzer. En em vodet hon eus ni, Beleion, dirak sant Erwan ha touet ehon eus flastrañ kenwallerezh pe ziseblantted an dud kiriek ha goulenn start pezh a zo reizh."

"Ganet ez eus ur spi. Gant ar F.L.B. he deus dizolañ yaouankiz Vreizh na oa ket ar bobl-mañ war he gourvez gourvez evit mervel, e oa ganti c'hoazh an nerzhioù ret evit goulenn ar gwir da vevañ. Ni, beleion Vreizh, hon eus dibabet ar stourm hag e gas a raimp endro betek dieubidigezh wirion Vreizh."

"Gant ar veleion tost ouzh ar F.L.B. ez a bremañ beleion all, gounezet d'ar mennozioù sokialour, a gav o bleuñv er stourm evit Breizh ; evelomp o deus meizet emomp o c'houzañv amañ ur gorvoidigezh e daou zoare : ur gorvoidigezh kevalour o tiskar mab-den evel labourer ; ur gorvoidigezh trevadennerez o tiskar an den brezhon evel Brezhon. Diglok eo dielfennadur ar varsourion dre ma n'anavezont er gevredigezh vreizhat nemet ar seurt kentañ. Henn adlavarout a ran : e Breizh e kaver - ouzhpenn korvoidigezh mab-den gant mab-den -korvoidigezh ur ouenn bihanniverel gant ur Stad impalaerelour ha kreizennelour : ar Stad c'hall. An hevelep hentadur a heuilh ivez an dud eus an tu kleiz e Breizh, adal ar P.S.U. betek ar Strollad Komunour Breizhat. Kavout a ra dezho holl ne c'heller ket komz hepken eus ar stourm etre renkadoù amañ. Evit tizhout ar pal da vat e teuont d'ar stourm dieubiñ ur bobl wasket."

EMAOMP OC'H ADKAVOUT AR BOBL EN HE STOURMOU

"O vezañ maz eo hon uhelvennad avielel abeg hor stourm e tegasomp d'ar stourm dispac'hel ur "praksiz" nevez, ur c'hoell efedusoc'h ha deneloc'h a-dra-sur eget ar stourm etre ar renkadoù hag o klotañ gwelloc'h gant hon atebeg a veleg. Lakaet hon eus e-lec'h daelerezh ar gasoni daelerezh ar garantez. Dre ma karomp hor pobl, dre ma ouzomp he deus enni hec'h unan talvoudegezhioù a c'hell pinvidikaat ar peurrest eus an dnelezh, dre ma c'houzañvomp

a-gevret ganti an direizhderioù emañ-hi o c'houzañv,
e tleomp-ni beleion Vreizh bezañ ar rakward eus lu
dieuberion Vreizh."

"Evidomp-ni da gavout kalon ha sklerijenn
war an hent-se hon eus kelennadurezh an Iliz, dreist-holl
ebarzh "POPULORUM PROGRESSIO" ("Diorreadur ar pobloù").
Anavezout a rit moarvat an diskleriadenn nerzhek-mañ :
'Ret eo deomp embann en doare splannañ ez eo kement
politikerezh a glask skoilhañ beoder ha diorreadur ar
bihanniveroù ur gwall grevus a-enep d'ar reizhded,
grevusoc'h c'hoazh pa vez pal ar seurt obererezh o
lakaat da vont da get. A du gin, n'eus netra heñveloc'h
ouzh ar reizhded eget al labour sevenet gant ar galloudoù
kevredik evit gwellaat amplegoù-bevañ ar bihanniveroù
gouennel, pergen evit pezh a sell ouzh o yezh, o sevenadur,
o gizioù o aezamantoù hag o embregerezhioù armerzhel...'
D'ar mare ma voe embannet ar gelc'hélenn-se n'em eus
lennet pennad ebet o venegiñ an arroud-se en ur gelaouenn
c'hall bennak. N'eus ket eus ar gudenn-se e Bro-C'hall
moarvat..."

"Eo! Bez ez eus anezhi. Sellit endro deoc'h.
Ar veleion spiswel zo droug enno ; ur boan spontus eo
bevañ er vro-mañ, santout n'o deus an dud-se personelezh
ebet ken ; ar vuhez, e seurt degouezh, a zeu da vezañ ur
brizh-voaz ha netra ken , n'eus dazont ebet er vro-mañ,
heñvel ar vuhez ouzh an diskianterezh livet gant Sartre ;
en em gavout a reer en un dachenn diskar ha distrujañ :
mezventi, kleñvedoù an nervennoù, emlazhadennoù. Ret eo
daskoriñ d'ar bobl an ene a zo bet diframmet diganti,
gant ar c'hevala sevenadurel hag istorel a ya d'ober ar
vroadelezh vrezhon. N'eus ket hepken da saveteiñ ar mein
kozh ; ar Breizhad a zo e unan ur bennoberenn en arvar."

"Dre sentidigezh edomp o kerzhout er-maez
eus ar garavanenn. Bremañ emamp oc'h adkavout ar bobl
en he stourmoù. A-benn dek vloaz e c'hallimp degas da
stourmoù dieubiñ ar pobloù elfennoù ensavus ha reiñ da
Vro-C'hall ur mennoz all diwar he fenn hec'h unan. Komprenet
e vo neuze ne oa ket an doare bezañ gall hiziv an hini gwellañ
daoust dezhañ bezañ a-du gant ar gouarnamant hag an
ensavadurioù. Ya, politikel ha dispachél eo hor stourm.
Nac'hañ a reomp ar gerioù "rannvroelour", "digreizennadur"
ha maz eus tud evit komz c'hoazh eus Frañs "kevreadel"
pe eus "emrenerezh en ur c'hengevredad gall" ne fell ket
mui d'ar re yaouank bezañ keodedourion ur riez he deus
graet deomp kement a zroug. Ar pleg-se moarvat a zeuy
da vezañ an hini kreñvañ a-benn c'hwec'h pe seizh vloaz.
Gwechall e oa tu d'hor bleniañ d'an emgann gant ur banne
rom : hiziv e c'houlenn ar re yaouank a-raok kemer perzh
en un dra bennak : "Eus petra ez eus keal?" An alkol a
zamvezve ar stourmerion evit un nebeut eurvezhioù. Gant
ar chealioù avat e vez broudet ar stourmerion hiziv ;
evit ar vuhez a-bezh! Ha ma varvont e ouezint, da nebeutañ,

evit petra e raint..."

Seizh vloaz hag hanter-kant en deus person
Gomenec'h.

PA VEZ AR SONER BINIOU KLEIZELOUR...

Pemp bloaz ha tregont en deus Youenn.
Unan eus diazezerion ar Strollad komunour breizhat
ez eo. Ur c'hleizour! Ne glot ket e zoare avat gant
patrom mojennel ar c'hleizour a vez diskouezet gant
an U.D.R. Daoust dezhañ bezañ tad a dri bugel, soner
biniou ha bet gwechall soudard en ALjeria ez eo war un
dro kourataer kenwerzhel ha stourmer politikel difaezhus.

"E Paris, e-lec'h em eus stourmet e talbenn
al labourerion vrezhon, en em santen ken estren ouzh ar
C'hallaoued hag ouzh Aljeriz. Met displeget o deus din
Fellagaiz e oa o stourm dieubiñ broadel ivez ur stourm
sokialour. Dre an EMSAV ez on deuet d'ar varksouriezh
hag e diskar-amzer 1970 em eus emezelet e "Bretagne
Révolutionnaire" ("Breizh dispac'hel") e-lec'h m'edo
elfennoù kentañ ar P.C.B."

"Perak sevel ur strollad komunour breizhat?
Evit derc'hel kont eus doareoù a-ziforc'h ar stourm e
Breizh, eus an amlegoù brezel, kevredigezhel ha seven-
adurel a ra ac'hanomp ur gumuniezh distag diouzh ar re
all. Se n'e lavar ket en em lakaomp er-maez eus ar
stourmoù araogelour renet dre ar bed nemet e kredomp
ez eo an emrenerezh an tu nemetañ a aotreo da bobl
Vreizh goveliañ binvioù he dieubidigezh klok. N'eo
ket ar gostezenn gleiz c'hall a c'hell o reiñ dezhi
gant he chaovinegezh c'hall : dre maz int prederiet
dreist-holl gant an dilennadegoù ez eo stag strolladoù
an tu kleiz gall da wikefreoù ar Stad kevalaour : ne
fell ket deomp sujañ hon stourm d'o c'houlzouriezh."

"Abaoe ar grennamzer o deus stourmet ar
Vrezhoned ouzh an impalaerelouriezh c'hall. Bepred o
deus roet darbar d'ar Stad c'hall he deus enebet ouzh
kement-se dre glask mogañ hor sevenadur. Evidomp-ni
ez eo Frañs ur vroad artifikel, kenderc'h istorel un
impalaerelouriezh e-lec'h e oa dalc'het ar galloud gant
an nerzhoù-mogañ-mañ : roueelezh, lu, iliz ha bourc'h-
iziezh. A-enep da ardivink ar Stad vodern, kemmesket
gant ardivink an unwerzherezhioù, emañ broad Vreizh
oc'h adsevel hiziv e ser stourmadennoù a lakay holl
c'houzañvidi ar gorvoidigezh kevalaour d'en em unaniñ."

"Dre an darvoudoù e tiskouez deomp ar
varksouriezh-leninouriezh ez eo ret stagañ stourmoù al
labourerion ouzh stourmoù ar braadoù gwasket. Dre labourat
evit unaniezh ar bobl vrezhon e tiskouezo ar P.C.B.
ne c'heller ket dispartiañ an emskiant-renkad diouzh an
emskiant-vroad. Taget e vezomp eveljust gant an holl re

a ra o mad eus stad an traoù bremañ. War zigareziou liesdoare e vez nac'het ouzhimp abaoe tri miz kaout ur gont-red en ti-post e Roazhon gant ar mererezh gall. diouz un tu all e vez graet ac'hanomp faskourion ha "disrannourion" gant ar P.C.F. met kalz kelligoù zo a-du ganimp dre guzh e-lec'h maz eo anavezet kudenn Vreizh. Aozet hon eus bodadegoù foran a-gevret gant aozadurioù araogelour ha kleizelour, eus ar P.S.U. betek ar vaourion."

"Evit tizhout an unaniezh-ober e rank enta... hon c'henberzhidi kompren en em savlec'hiomp er-maez eus o meizframm c'hwec'hkognek. Sellit, da skouer, ouzh ar C.F.D.T. : dont a ra al liv brezhon da vezañ anatoc'h-anatañ en hec'h azgoulennou. Kroget he deus gant un ergerzh-brudañ evit an implij : "Gourc'hweliou e Breizh" a lavar he skritelloù; seurt araokadenn he deus gellet ober ar C.F.D.T. dre m'o deus ar renerion anezhi e Breizh un tamm emrenerezh war an dachenn."

"Heñveldra evit ar "Jeunes agriculteurs" ("Gounezerion yaouank") Diwar zivroadur ar gouerion o deus ar gouerion emouezet ouzh dibarelezh ar c'hudennoù o deus da ziskoulmañ e Breizh. Komprenet o deus n'o doa netra da c'hounit e framm Frañs dre maz ay ar maout bepred gant ar c'hounezerion winizh ha boetrabez-sukr e divizadurioù ar gouarnamant gall ; komprenet o deus e oa bet aberzhet kouerion Vreizh a-ratozh er c'hen-varc'had. Piv eta, d'ar mare m'eo bet savet hemañ, a zo bet chalet gant ar primeostoù, an deñved hag ar c'henderc'hadoù laezhat e Breizh, kollet ganto marc'hadoù Breizh-Veur ? Kendaoniñ a ra hiziv kouerion Vreizh ar reizhiad kevalaour a-du gant ar winizherion vras ha reiñ a reont d'o displegadegoù ul liv breizhat..."

"Diaesoc'h eo hon darempredoù gant kempennourion an Emsav, dreist-holl gant an U.D.B., a zo, mar fell deoc'h, heñvel ouzh ar pezh e oa an M.N.A. e keñver emsav Aljeria. En o aez en em gav paotred an U.D.B. e framm Frañs. Ne fell ket dezho kas da get frammoù ar riez-se met kempenn hepken darempredoù ar "rannvro" gant ar Stad."

"Disrannourion? Klask a ra ar vourc'hizion lakaat warnomp ar skritell-se. Disrannourion ? Ya, ma ne c'hellomp ket ober e-giz-all. Ne c'houlennomp ket harzoù war ribloù ar Gouesnun. Ar frankiz an hini eo a c'houlennomp, pezh a dalv adsevel hor personelezh vrezhon. Ma teufe ur reizhiad sokialour gwirion da vezañ diazezet e Paris e vefe diskoulmet hor c'hudennoù. C'hwi ' lavar din e oa an ao.ao. Lacoste ha Guy Mollet e penn ar Stad c'hall da vare br@zel Aljeria... Komz a ran deoc'h eus sokialourion wirion. Ma ne vefe ket ur reizhiad sokialour e Bro-C'hall evit anzav gwirioù Breizh ne vefe ket ur reizhiad sokialour gwirion ha dre se ez adkrogfemp gant ar stourm."

NOTENN diwar-benn

TALVOUDEGEZH PLEUSTREK

an devezhioù-studi

Emañ devezhioù-studi S.A.E. e Rosporden o paouez ec uif ha mat e vefe klask spisaat bremañ an dalvoudegezh anezho.

Dre vras e kav deomp ez eo an dalvoudegezh pennañ anezho boazañ an danvez emsaverion da vevañ en ur metou brezhon ha da implijout ar yezh en o darempredoù pemdeziek. Reiñ a reont tro ivez da brederiañ a-gevret diwar-benn kudennoù zo o tennañ d'an Emsav. Er c'heñver-se e c'heller lavarout ez int diziouerus. Ha mat eo liesaat seurt kampoù a grou etre an danvez emsaverion liammoù a zaremprederezh hag a gengarantez.

D'hor soñj e tleo reizhiad ar c'hampoù hag an devezhioù-studi bezañ diorreet war dri zu. Da gentañ e vo dav resizañ dezho un egor ^{mat} douaroniel termenet pervezh. Er c'heñver-se ez eo bet en hañv-mañ, da skouer, derc'hel ur marevezh-studi e Kernev hag unan alle Treger, daoust maz eus bet dalc'het daou varevezh-studi e Treger endev er bloaz-mañ. Ar pezh a zleor bukañ en dazont eo fiziout an devezhioù-studi lec'hel da stourmerion o chom war an dachenn.

Hogen n'eo ket hepken ledañ reizhiad an devezhioù-studi penn-da-benn ar vro a zo d'ober hogen ober anezhi ivez ur reizhiad-kelenn padus a yelo endro a-hed ar bloaz. Dav e vo pergen stankaat an dibenn-sizhunvezhioù war an dachenn ha bepred gant stourmerion diouzh al lec'h. Darn eus an dibenn-sizhunvezhioù-studi-se a c'hellfe vbezañ graet e galleg.

Ar pezh en deus graet diouer ar c'hrisañ betek henn eo an devezhioù-studi a zerez-uhel evi frammataerion an Emsav ha gouestlet da studi kudennoù a gelennadurezh. Ret eo

lavarout ez eo distank a-walc'h ivez ar stourmerion o deus desket a-walc'h ar yezh evit tennañ frouezh diouzh hevelep devezhioù-studi. Anat eo koulskoude ne c'hell sellout evel stourmerion gadarnaet nemet ar re o devo heuliet devezhioù-studi a seurt-mañ.

Gwelout a reer eta ez eo ledan ha liesseurt tachenn oberiañ an devezhioù-studi, o vont eus kelaouerezh diwar-benn an Emsav, kelennerezh ar yezh ha kadarnadur ar stourmerion dre ar studi ; ar bazenn diwezhañ hepken a zibouf war-eeun war al labour emsavel (ne gomzan ket eveljust eus an emsaverion a gemer perzh en daou rumm devezhioù-studi kentañ evel sternioù). Mallus e vo abarzh pell eta plediñ gant devezhioù-studi an trede rumm.

Y.O.

KELEIER EUS AR BROIOU KELTIEK

Abaoe m'eo krog ar brezel e Hanternoz Iwerzhon en deus klasket ar C'hevre keltiek mont war sikour ar vrogarourion a zo oc'h en em gannañ du-hont. SKOURR BREIZH AR C'HEVRE KELTIEK, pergen, dindan sinadur e rener, Jakez Derouet, en deus kaset ul lizher -klemm da vaodiern saoz an diabarzh, an ao. M.R. Mandling. Reiñ a raimp amañ e saozneg un nebeut pennadoù eus al lizher-se.

"Sir, I am writing on behalf of the breton members of the Celtic League, conscious also of affirming the view-point of the very largest part of the Breton People, who are aware of their affinity with the Irish and other celtic peoples; I wish to express their dismay at the english government's decision to intern 300 persons in Northern-Ireland. The partiality of this decision is obvious since no member of the extremist Orangist Associations was interned; and many were arrested who had not taken part in violent protests against the Stormont regime. The Bretons are also deeply disturbed at the brutalities which have been committed by the English army, and in particular the Military Police against the internees..."

Kaset oe bet al lizher-mañ d'ar 27 a viz Eost 1971

Ar Vrezhoned a garfe skoazellañ Iwerzhoniz a c'hell en em lakaat e darempred gant Jakez Derouet, 1 rue Géo-André, 44-NANTES.CCP/3264-47 NANTES
Levr-bloaz ar C'hevre a zo deuet er-maez ha bez e c'heller e breñañ digant J. Derouet : 15 lur da nebeutañ a zalc'h skodenn ar c'hevre, koumanant d'ar "Celtic News" hag al levr-bloaz. Ar memes priz eo evit ar re a fell dezho kaout al levr-bloaz ehep bezañ ezel.

A N E M S A V H A G A L L U S K A D O U

K E N E L E L O U R - K L E I Z O U R

Mat eo bet an devezhioù-studi S.A.E. e Rosporden, evel boaz ; e-pad dek devezh o deus skolidi S.A.E. studiet ar yezh a-zevri ha graet anaoudegezh - evit darn anezho - gant an Emsav, ar pezh a zo a bouez brasoc'h eget studiañ ar yezh, a gav deomp rak dre seurt kejadegoù hepken e c'hell an danvez stourmerion meizañ petra eo eo an Emsav hag en em stagañ outañ. Ouzhpennomp a-hend-all ez eus bet studiet kudennoù liesseurt e-kerzh kendaelioù an endervezh e-doug ar c'hampvezh-mañ , menegomp an hini a voe gouestlet da S.A.E. end-eeun pe da roll ar feulster pe an nann-feulster (na harzerezh difeuls) en un argerzh dispac'hel.

Er pennad-mañ ne fell deomp nemet ober un nebeut addisplegoù da obererezh polifikel rik ar c'hamp a zo c'hoarvezet dreist-holl eus kouviañ stourmerion bolitikel zo da gendaeliñ gant skolidi S.A.E. a oa bet bodet e Rosporden e ser an devezhioù -studi, elese, pergen, an Ao. G. Caro, unan eus stourmerion bennañ ar P.S.U. e Breizh hag izili eus ar C.D.J.A. eus rannbarzh Kemper-Rosporden.

Anat eo e wisk seurt kejadenoù ur ster politikel. A-berzh an Emsav e tiskouezfe hevelep kejadenoù n'eo ket an Emsaverion enebet a-priori ouzh tezennoù sokialour zo a zo difennet gant izili ar P.S.U. pe ar C.D.J.A. e Breizh. A-berzh al luskadoù-se e tiskouezfe ar c'hejadenoù- mañ n'eo ket ar stourmerion anezho enebet a-priori ouzh tezennoù an Emsav.

Un dalvoudegezh all en deus avat an darvoud-mañ : lakaat anat an ezhomm a vez santet gant stourmerion bolitikel zo e Breizh da zont er-maez eus an digenvez m'emaint bac'het ennañ. Daoust maz eo c'haarvezet gant ar P.S.U. e Breizh gounit dilennadegoù zo en deus poan ar strollad-mañ d'en em dermeniñ ha da gemer e lec'h etre ar P.C.F. a zo diazezet abaoe pelloc'h egetañ e Breizh - hag a zo frammet kalz startoc'h egetañ - hag ar c'hostezennoù kleizat gall all

(1) "Kenelelour" "ethniciste" eus "kenel" : "ethnie".

hep kontañ ar strollouigoù brezhon kleizelour pe gleizat : P.C.B., U.D.B. h.a. Evit ar C.D.J.A. e c'hoarvez an hevelep tra war ur bazenn all rak an darn-vuiañ eus ar gouerion e Breizh betek hiziv ne zegemeront ket nemeur o savboentoù ; ur bihanniver eo ar gevarzhe-mañ e-touez ar c'hweuniadoù kouerion all ; n'eo ket souezhus eta e klaskfe an izili anezhañ displegañ o zezenoù dirak kement foran bennak a zo prest d'o selaou.

Hogen eus ar P.S.U. e fellfe din komz dreist-holl. Evit a sell ouzh hemañ e c'heller lakaat kiriek^{de} emzigoradur un nebeut darvoudoù all. Savet gant un nebeut kefredourion c'hall ha na c'hellent ket degemer yev dir ar P.C.F. stalinour bepred da goulz brezel Aljeria - darn anezho a oa kristenion a-hend-all - en deus klasket ar P.S.U. dibab e lec'h er bed politikel gall oc'h arnodiñ "korntroia" ar P.C.F. war an tu kleiz, dreist-holl abaoe miz Mae 1968', dre zedennañ dezhañ e unan luskadoù kleizelour ha dispac'helour a bep seurt (se zo bet anat dreist-holl e-kerzh kendalc'h diwezhañ ar Strollad en deus roet darbar d'ar rener anezhañ an ao. Rocard a voe burutellet e bolitikerezh gant an askell gleiz pellañ). Hiziv an deiz e kaver er strollad-mañ stourmerion a harp mui pe vui ar gelennadurezh vaogat. Hogen, war a hañval, ha dalc'hmat diwar e c'hoant tuta ha ledañ e ezelerezh, ez eo bet degaset ar strollad-mañ da deurel evezh ouzh savlec'hiadurioù ar gempennelourion a-gleiz okitanat, bet displeget gant Lafont pergen. Techet eo ar P.S.U. eta da zegemer tezennoù zo : hini ar "c'henelioù" pe hini an "trevadennadur diabarzh" kaset da benn gant "gouarnamant kreiz" Paris. An emzalc'h politikel nevez-mañ a zo bet kadarnaet n'eus ket pellzo gant un diskleriadenn gefridiel graet gant an ao. Caro end-eeun hag embannet er c'hazetennoù un nebeut sizhunioù zo.

N'hon eus ket da vurutellañ amañ tezennoù ar "genelelouriezh" lakaet diouzh ar c'hiz gant rannvroelourion gempennelour okitanat. Ensellomp hepken ar P.S.U. egiz m'emañ ha gwelomp e peseurt-doare ha betek peseurt poent e c'hell bezañ mat kaout darempredoù mat gant ar P.S.U.

Evit se ez eo ret anavezout kreñvderioù koulz ha gwanderoù

an aozadur politikel-mañ hogen dreist-holl e wanderioù, a gav deomp. Hag unan eus sioù anatañ ar Strollad-mañ a zo e zizunvaniezh hag e ziframm a zever, d'hor soñj, diwar e goulzelouriezh. Hañvalout a ra ar P.S.U. bezañ un daspugnad stourmerion liesseurt o mennozioù ha diempret a-walc'h o urzhiadur(1).

O terc'hel kont eta eus an dezrannadur-mañ, setu eta, d'hor soñj, an emzalc'h a ranker kaout e-keñver ur Strollad politikel gall a seurt gant ar P.S.U. : arabat eo, war zigarez ebet, evel ma tamvenegfe hini pe hini, emezelañ ennañ gant ar spi da reiñ dezhañ e Breizh ur spered broadel bennak ha zoken da vrezhonekaat anezhañ. Emdouell ne vefe ken hevelep goanag didro. Hogen reiñ a rin bremañ da heul an abegoù a zo da gemer an emzalc'h-mañ.

Da gentañ, arabat eo reiñ d'ar P.S.U. e Breizh ur pouez ha n'en deus ket. Pa drofemp an holl izili anezhañ e Breizh da "vroadelourion" - ha gwelet hon eus pegen liesdoare eo o mennozioù - ne vefemp ket kalz tostoc'h d'ar pal evit keloù-se. War dachenn ar Stad c'hall zoken ne zastum ket ar P.S.U. kalz en tu-hont da 5% eus ar mouezhioù en dilennadegoù. Ar yoc'h eta, evit ar poent, ne heuilh ket anezhañ, nag e Breizh nag e Bro-C'hall.

D'an eil, bez e rank an emsaverion meizañ n'en deus ar strollad-se na kelennadurezh resis ebet (ur "programme d'action" en deus hepken) na framm start ebet. N'en deuschañs ebet a-enep d'ar P.C.F. Hag en un argerzh dispac'hel bennak ne c'hoarife e Bro-C'hall nemet roll an anarkourion er Spagn e-pad brezel Spagn.

D'an trede, erakwelioù war un danvez emgav dispac'hel war verr dermen e Bro-C'hall a denn d'an huñvre hepken er c'hendegouezh politikel a vremañ, pergen war ar bazenn etrevroadel. Se hon eus diskouezet meur a wech er gelaouenn-mañ.

Lakaomp erfin e c'hellfe ar P.S.U. kemer ar galloud e unan

(1).- Unan eus pennaennoù ar Strollad a vefe, war a seblant c'hoarvezout eus diazezañ an ober politikel war emdarzhegezh hag intrudu ar "yoc'h". Pa lenner, da skouer, ar "Programme d'action du Parti socialiste Unifié" e verzer, da skouer, o deus kemeret perzh en aozidigezh anezhi stourmerion ha n'oant ket dre ret izili eus ar Strollad. En^{em} c'houlenn a c'heller avat ha gouest e vefe ar P.S.U. da herzel ouzh daelerezh ar P.C.F. en un degouezh dispac'hel gwirion, o vezañ m'en em lec'hi, n'eus forzh penaos, en hevelep framm politikel hag en ha na tegener ivez an hevelep pennaennoù poltikel hag en.

er Stad c'hall n'o dije na Breizh nag an Emsav netra mui da c'hortoz digantañ eget digant n'eus forzh peseurt strollad gall all evit daou abeg: 1) kelennadurezh okitanat ar "c'henelioù" n'he deus diazez start ebet; 2) ne c'hell ket ur strollad kemm frammadur milvedel, koulz lavaret, ur Stad bennak en ur chom er frammadur-se end-eeun. Se a zo bet anat a-walc'h abaoe 1917 e Rusia end-eeun. E ser se, kounomp ouzhpenn ar promesaoù a voe graet da Gembreiz gant ar Strollad Labour e unan en un amzer ma oa o klask tuta evit kemer ar galloud, da hini ebet eus ar promesaoù-se ne zalc'has ar Strollad-se ur wech m'en devoe kemeret ar galloud e Lunden.

Dre se ne c'hell pep darempred gant stourmerion ar P.S.U. e Breizh kaout nemet un amkan: lakaat ar stourmerion-se da anavezout Breizh evel o bro, kuitaat ar framm gall - da lavarout eo o strollad diouzh ma chomo ur strollad bevnet da Vro-C'hall; o degas da lec'hiañ e Breizh hepken an dezrann a reont eus ar saviad politikel-kevredigezhel(2) a lec'hiont betek henn e Bro-C'hall. N'eus ket anv, evel ma lavaremp, ez afe stourmerion vrezhon zo er P.S.U. evit reiñ ur spered brezhon dezhañ; kement-se e gwirionez n'en defe ster ebet. Ar pezh a c'heller kinnig hepken da stourmerion ar P.S.U. a zo dedennet gant Breizh eo heuliañ kentelioù ha devezhioù-studi S.A.E. Ha diwezhatoc'h, ma teuont da sellout ouzh Breizh evel ouzh o mammvro, egiz ma ra an emsaverion, kemer perzh e labour an Emsav ouzh e lakaat da dennañ mad eus o skiant-prenet war dachenn ar stourm sokialour. D'ar mare-se e kuitaint istor Bro-C'hall hag ar P.S.U. a zo darn eus istor Bro-c'hall evit degemer istor Breizh hag an Emsav a zo kendalc'h istor Breizh. Ne vern penaos, da izili brezhon ar strolladoù gall e Breizh eo dont d'an Emsav; heuliañ an hent kontrol, anat eo, ne c'hellfe nemet disoc'hañ da zistrujañ an Emsav, ha kement-se, war hor mennoz, a zle bezañ sklaer e spered an holl (3).

H.K.

(2) Ar "Programme d'action du Parti Socialiste Unifié" ne ro betek hiziv lec'h arbennik ebet da Vreizh.

(3) Ar gudenn a sav eo hini gouzout betek pegeit e c'hell bezañ talvoudus derc'hel en o sav ar strolloù kleizelour e Breizh gant ar mennad da dalañ ouzh levezon ar P.C.F. Penn-dalvoudigezh ar strolloù-se e Breizh a zo gwanaat an nerzh gall ez eo ar P.C.F. e Breizh betek hiziv.

